


SON AN ANDUILHENN



Bis-koazh m'eus c'hoarzhet kement all,
e traou laou liou laou leno , Evel
barzh e Sizun an deiz all , O . traou laou liou la laou lala , Evel
barzh e Sizun an deiz all, O traou laou liou laou le - no .

- | | |
|--|--|
| <p style="text-align: center;">I</p> <p>Biskoazh 'm eus c'hoarzhet kement
O traou laou liou laou leno ! [all,
Evel barzh e Sizun an deiz all,
O traou laou liou la laou la la !
Evel barzh e Sizun an deiz all,
O traou laou liou laou leno !</p> <p style="text-align: center;">II</p> <p>D'an ofer'nn-bred goude ar prôn (1)
Oa ar biniou gant ar person.</p> <p style="text-align: center;">III</p> <p>Ha d'ar Gousperoù goude-se
Oa ar vombard gant ar c'hure.</p> <p style="text-align: center;">IV</p> <p>An Aotrou Person 'n doa c'hoantaet
Kaout an anduilhenn mogedet.</p> <p style="text-align: center;">V</p> <p>Kaset ar vatezh d'ar Fouilhez,
Evit kerc'hat un anduilhenn.</p> <p style="text-align: center;">VI</p> <p>Pa oa distroet ar plac'h d'ar gêr,
Taolet an anduilhenn er <i>pod-fer</i> (2)</p> | <p style="text-align: center;">VII</p> <p>Ne oa ket c'hoazh poazhet-mat,
Pa oa bet tennet war ar plad.)</p> <p style="text-align: center;">VIII</p> <p>Pa oa troc'het an anduilhenn
He doa leket ur flieriadenn.</p> <p style="text-align: center;">IX</p> <p>'n Aotrou Kure a grie forzh
Testiñ an anduilhenn war ar porzh.</p> <p style="text-align: center;">X</p> <p>Ki ar person oa eno tost
Save e benn, fiche e lost.</p> <p style="text-align: center;">XI</p> <p>Petra 'ra deoc'h, Annaig ar Rouz,
Ma 'rit c'hwi bremañ anduilhenn
[louz ».</p> <p style="text-align: center;">XII</p> <p>Me a goust arc'hant din, va moc'h,
A rank o gwerzhañ kig ha kaoc'h ! »</p> |
|--|--|
- 1) Prôn, prezegenn. 2) Pod-fer, pod-houarn.
- (Ton ha komzoù dastumet gant JARL KOAD ha kanet gant an
Ao. SANKER, botaoer-koad e Sant-Tegoneg (Bro-Leon).

ATTENTION ! CHANGEMENT D'ADRESSE :
A dater du 15 avril 1950,
Polig MONJARRET
12, rue du Mur, MORLAIX (Finistère)